

KANTIK

ILIS SCAER

Kenta Ioden

Var an douar evel en Ee
Gloar ha meuleudi da Zoue ;
Var an huel hac en draonien
Ra vezo meulet da viken.

Ia, da Zoue gloar da genta,
Eb ners e c'hras n'hellomp netra ;
N'hellomp sevel goude cals poan,
Na lochen soul, na ti balan.

N'hellomp sevel nebeutoc'h c'hoas,
Na pales kaër, nac ilis vras ;
Doue a ioa ganeoc'h Skaëris...
Rac setu peur c'hreat oc'h ilis.

E maï peur c'hreat... sellit outhi...
Kaer eo ha koant dreist peb hini,
Kouls ha rouanes eo guisket
Gant he zae mein dantelezet.

Dre bep prenestr ar sklerijen
A dars pinvidic ha laouen ;
Pa zellan ous ar pemp aoter
Pemp tron a velan d'hor Zalver.

Ar pillerou nerzus ha teo
A zo henvel eus guez dero ;
Dindan ar beac'h ne blegint ket,
Chom a rai soum ho fenn kalet.

Breudeur na c'hui zo evurus
Da rei digemer da Jesus,
Da rei dezhan enn oc'h ilis
Ker pinvidik, ker brao lojeis.

Ma coustas deoc'h a koustet eo
Bezit laouen evelato ;
Rei dan ilis, d'ar zent ive
A dal ouspen prena leve.

Bennos, bennos da gement den
En deus digaset aluzen :
Grit, va Doue, grit ma cavo
Eas ar vuez, dous ar maro.

Evesañ brema gant feis,
Guelit petra eo eunn ilis ;
Evit ma viot aman bepret
Leun a zoujans hac a respet.

Eil loden

Santel, santel teir guech santel
Eo ti ar Roue eternal ;
Santel vel ar spern entanet
A velas guechal ar profet.

Santel evel ar c'hraou dister
A c'hanas ennhan hor Zalver,
Santel evel ti ar Verc'hez
Ha pri ar jardin Olivez.

Santel, santel vel ar mene
Ruziet gant goad guir Vab Doue.
Santel erfin vel an envou,
Pales skedus ar sperejou.

Aman e chom an Doue bras
A reas ann heol hac ar mor glas,
A zo dezhan ann tan, ar skourn,
A zalc'h ar bed var bal he zourn.

Ia, ann ilis eo ti Doue,
Ti ann eles, porchet an Ee ;
O tont aman stouit ho penn
Kouezit d'ann daoulin kristenien.

An ilis eo ti ar pardon,
Ti ar beden, neis ar galon :
E c'hars Jesus, tud glac'haret,
E man ar peoc'h, hag ar iec'het.

E c'hars Jesus, c'hui pec'herien,
Taolit ho peac'h hac ho chaden ;
M'ho peuz glahar deut gant fisians
Eman eo ti ann esperans.

Hac e vec'h pell var ann hent fall
Merk du ann ifern var ho tal,
Dre zacramant ar binijen
C'hui vezo rentet pur ha guenn.

P'edo Jesus var an douar
Eus ar bes e tennas Lazar,
He hano zo dreist peb hano,
He goms a drec'h ners ar maro.

M'ho peus naoun, m'ho peus sec'het
Tostaït ous taol ar banket :
Aman Jesus d'he vugale
A ro bara divin an Ee.

Ma klaskit hent stris ar vuez
Setu kador ar virionez :
Santel eta, teir guech santel
Eo ti ar Roue Eternel.

Trede loden.

A galon vad, o va Doue,
Ni ro lojeis d'ho majeste ;
Ah ! diskennit gant oc'h Elez
Da jom bepred enn hon touez.

Er gout a reomp eur pales aour
Ne ve nemet dister ha paour,
Mes, c'hui ganet enn eur c'hraouik ;
Ne glaskit ket traou pinvidik.

C'hui deu da glask hor c'halonou
Deoc'h e vizint o va Aotrou ;
Eur galon hor bezo ebken
Ha deoc'h e vezo da viken.

Ni garo Doue dreist peb tra,
Ni garo ivez hon nesa ;
Evel ar mein hor beus savet
Atao ni jomo unanet.

Ha c'hui tud koz, doun er beziou,
C'hui pezo pers er pedennou
A raïmp aman enn ho kichen
Hed sacrifis ann oferen.

Ia, kouls ha c'hui bepred Skaëris
A zalc'ho stard, ha stard d'ho feis,
D'ho feis koz enn ilis nevez
Hirio, varc'hoas ha da james.

Pa zeo eman ti ar beden
Selaouit Jesus hor goulen :
E Breiz-Izel hag e pep bro
Ra vezo meulet oc'h hano !

Ra vezo caret ar Verc'hez
Hac ilis Rom hor magerez :
Tennit pelloc'h bagik sant Per
Eus ar mor rust hac ar reier.

Hor mirit oll dious ar pec'het
Dious ann tan goal hag ar c'hlenvet ;
Pellaït ar maro spontus
A deuffe gant e falc'h e kuz.

Roït eost founnus d'ar parkeier,
Glasder ha ieot d'ar prajeier,
Roït e vara da bep hini
Hac eur galon iac'h d'en dibri.

O va Doue, p'hor beus savet
Eunn ilis d'ho tigemeret :
Roït deomp-ni oll er barados
Eur plasik eun deis da repos.

Grit ma velimp e creïs ar joa
Sant Alan, santez Kandida ;
Grit ma canimp gant-ho enn Ee :
Gloar ha meuleudi da Zoue.

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 19 Juin 1873.

DU MARHALLAC'H, vic. gén.